

15 DU - 15 KERZU 75

«POBL VREIZH»

B.P. 304

29273 BREST-CEDEX

koumanantou

Boutin : 10 lur

Skoazell : **adaleg 20 lur**

C.C.P. 2746-79 Rennes.

NIV. 69

1 LUR

POBL VREIZH

TRAWALC'H GANT AR C'HOLONIALISM

Micherourien L.T.T. Lanuon a zo en grêv ur sizhun 'zo. Kapitalisted an L.T.T. a glask gwashaad kadañsoù hag a zo stard dija. Ha kement-se toud ewid peamanchoù dister-spontus e-keñver re usin Conflans-Ste-Honorine, e lec'h m'o deus ar vicherourien goprou (1) n'eus ket e Lanuon.

Setu ur skwer ouzhpenn eus stad trevadennel (2) Breizh. Dreist goundoù euzhus a vez graet gant ar Sossietoù bras diwar goust al labourerien vreton.

Breizh ne vo ket ur mirlec'h (3) ewid ar pollis pe merdeadurezh (4) vresel ar Stad C'hall ! Ne vo ket kennebeut ur mirlec'h labourerien marc'had-mad !

Red eo dimp goulenn labourioù a-zoare, met iwez peamanchoù a-zoare war un dro. N'eo ket marc'hadmatoc'h ar vuhez amañ ewid e kostez Paris.

Ha red e vo ober trous e doare tud Enes-Korsika ewid bezañ klewet ? Mantrus e vefe a dra-sur.

Kevrenn U.D.B. Lanuon a sav a-du-

krenn gant al labourerien a stourm en L.T.T. N'eo ket kredapl e vije dalc'het da baeañ disheñvel ar memes labour diouzh ma vez graet en Breizh pe en Paris !

Doujañs d'al labourerien !

Labour ar Vretoned a dalv hini ar re all !

- (1) *gopr* : salaire
- (2) *trevadennel* : colonial
- (3) *mirlec'h* : réservoir
- (4) *merdeadurezh* : marine



Klic'hed an Telegramme

Micherourien an L.T.T. o vanfestiñ en Lanuon ewid sikour a c'hamaraded

Hag a-nevez en-dro dimp ?

NEWEZ—AMZER PE DISKAR-AMZER E ROAZON ?

Doriol serret, gouleier laç'het, kirri-houarn bihan (kaddy-ou) bennet an eil war egile dirag gwer-bras ar stalioù, tammou kartofa en istrilbik skrivet warno klemmoù al labourerien, micherourien ha micherouresed o twall an traoù, ha tud o vont hag o tont war dro, safu un arvent e vezed kustum da weled e-mes Gwengolo drouk tu Z.U.P. Su Roazon, e-lec'h 'ma stalioù bras an Mammouth hag an Newez-Amzer (Printemps).

Tost da deir stizhun an deus padet harz-labour paotred ar Mammouth, adaleg devezh kentañ mes Gwengolo. Adtroget o deus gant o labour goude bezañ bet gounezet meur a dra o doa goullennet. Med er «Printemps» arestet kasimant er memes poent, e pade staw ar jec e dienn ar ma, rag ne felle ket c'hoazh d'ar batronez plegañ d'ar goullennou.

Ar goullennou-mañ, koulskoude, n'int ket ken lak-se, pa ouzer e c'houm da skwer, ur vaoues o kontañ pris ar varc'hadourzh hag o resse ar arc'hant digant ar glianted, 1 306 ur ma ewid 173 eur labour, goude bezañ bet 4 bloaz er stal, 200 lur, setu pezh e c'houlen ar sindikajoù, Goullenn a reont iwez e vefe hanvet da velet titlitalieret ar gwerzhersed goude ur misvezh labour er stal, e-lec'h lezel aneho a-istrilbik e-pad pell-amzer ewid gailloù paeañ aneho nebeutoc'h ha taol aneho er maes asoc'h.

Pezh a c'hoarvez er stourm-mañ a ziskouez mad, ur wech ouzhpenn, pegen dieter eo stad al labourerien e Breizh : pa ne chomont ket heb labour, e rankont ober gant paeoù iseloc'h ewid e-lec'h all, ewid brasañ goude ar c'hevredigezhioù bras ha paotred an arc'hant hag ar gailloù. Pa oa kresket dre 8 % goroù labourerien ar «Printemps», e-lec'h all e-mes Gouere 1974, n'o doa ressevet reoù Roazon nemet 4 %. Memes taol e-mes Gouere ar bloaz-mañ : 2,5 % e-lec'h all ha netra amañ. Ha koulskoude, e-pad meur a vis, stal Roazon 'ni eo, zo bet da gentañ toud, e-toues an holl stalioù gant ar memes hano er c'hevredigezhioù, ewid pezh e sail ouzher kresk an aferioù hag an arc'hant gounezet.

Ur skwer muioc'h da zisplegañ penaos e vez sunnet bennoz buhez hor bro gant tud an diavaes, ha penaos e vez impiget dour-c'hwes labourerien Newez ewid pinwilkaad un toullad mac'homen.

DA ZESKIN BREZHONEG HA D'E BEURZESKIN UL LEVR NEWEZ SAVET GANT FANCH MORVANNOU :

ASSIMIL

«AR BREZHONEG DIDOR»

DOGANET OMP UR WECH OUZHPENN !

Martese eme Giscard o c'hortos meuleudiou digant ar Vretoned ewid ar plan burzhudus en eus ijinet da hadlañañ an ekonomiezh. Ac'hanta 'vat, ur vazhad 'n heni eo, ur walaennad zo da roñf dezhañ kentoc'h.

Lavaret zo bet dija gant strolladoù gall an tu kleiz hag ar sindikajoù petra oa da soñjal eus an treud ma oa ar plan-se ewid an dud vumud, ewid ar beorien, pa vez ingalet ar bras eus an arc'hant etre ar re binvidig. A-du krenn omp gante.

Med, gwelomp, ni, petra eo lod Breizh e-barzh an afer. Hervez, e vije bet madezhus ar gouarnamant en hon c'hefver, fidamdule, va 'vat !

Roet zo bet ur reform radoubu da Vrest Pell 'zo oa bet prometet, gant Messmer, gant Pompidou. A-benn ar fin hon eus bet anezhi. Ha Lombard war bennoù e zaoulin da ganañ meuleudi da Giscard. Brest en eus bet e drede reform radoubu, ha Marseille e... naved ! Roet zo 165 milion d'hen ober, pa gouste etre 300 ha 600 milion. Da dud Brest d'em em zibab da gaoud ar peurrest. Trugarez vras, Aotrou President !

Hag an hentchoù bras. Keloù newez iwez ! Sañset, hervez ar Vived plañ e vije bet peurachu an traoù a-benn 1976. Ewid gwir, biken ne vo graet an hanter aneze. 50 milion hon eus bet ar wech-mañ ewid takonañ hon hentchoù, pa vez roet 65 milion da sevel ur c'hasarn newez en Gwengamp.

33 milion ewid yec'hed ar Vretoned ha 54 milion da sevel tier newez ewid Minister an Diabarzh. Trugarez vras adarre, Aotrou President.

V'omp ket da arabadiñ pelloc'h. Travalc'h eo evlese, soñj ket deoc'h ?

Fall-pud eo ar plan-se ewid Breizh. Sikouret e vez an usimou bras, ha laosket e vo ar re vihan da venvel. Gwadañet e vo an digempoues etre ar broioù pinvidig hag ar broioù dileset e-barzh an Euzagon.

Dileset eo bet Breizh abaoe kantvedoù gant gouarnamant ar Frañs. Warlerc'hiet omp ha chom a rafomp warlerc'h da vikan ma ne vez ket cheñchet penn d'ar vazh.

E-pad 50 vloaz, araog ar Vived plañ, e oa an traoù evel-hen :

Paris a roe d'ar stad 25 % eus arc'hant tailhoù (limpoioù) ar Frañs hag a resseve 47 % eus an arc'hant a veze roet en-dro da beb korn eus an Euzagon.

Breizh a roe 5,6 % eus arc'hant an tailhoù ha ne resseve nemet 1,2 % eus an arc'hant en-dro. Ewid cheñch penn d'ar vazh, neuse, ewid ma vije un tamm justis e-barzh an Euzagon, daonet-mañ, e vije red krennañ an arc'hant roet da Breiz hag da Vreizh e-keit-se, etre 10 ha 15 % eus arc'hant ar Frañs. «Se zo sod !» a lavaro lod, Martese, med peadra zo da sodañ, iwez, pa weler penaos o deus gouvezet kapitalisted ar Frañs ober teñ gant.

Ac'hanta ! peogwir ne vo biken taolet pled ouzh Breizh gant gouarnamant Paris, e vo red-mad dimp-ni, Bretoned, en em unaniñ ewid hadperc'hennañ hon peadra.

Hag an doare gwellañ d'hen ober, eo dont e-barzh U.D.B. da sikour ac'hanomp da zigalonañ hon Bro.



DALC'HOMP SONJ !

Angel Otaegui Echevarria

METALOUR, 33 BLOAZ

Jose Luis Sanchez Bravo Sollas

STUDIER, 21 BLOAZ

Ramon Garcia Sanz

SOUDER, 27 BLOAZ

Juan Paredes Manot (Txiki)

MICHEROUR, 21 BLOAZ

José Umberto Baena Alonso

STUDIER, 23 BLOAZ

FUZUILHET GANT POLISSIEREN FRANCO
D'AR 27 A VIS GWENGOLO 1975
MARW EWID AL LIBERTE !

Ken fromas, ken heugus, eo bet al lac hadeg-mañ, ma 'z eo diases sevel frazennoù goude.

Gweloñc'h, eo embann gerioù 'zo, skrivet ganto o-unan araog marwel.

BAENA ALONSO, ur Galliediad anezhañ :

«N'eo nemed dre ar stourm a-eneb han enebour boutri, ar faskournezh, e vo postad etremp, ni holl pobloù ha broadoù BRO-SPAGN, govellañ ur republik pobleg ha kevredad, ma ne vo ket GALISSIS estrajourien ken enno ha ma vo an holl vicherourien enni, pe re GALISSIA, pe re KATALONIA, ANDALOUSIA, pe re MADRID, dieubet digant ar batronez, ha digant ar pennoù bras a laer aneze hag a vev diwar o c'houst...»

TXIKI, an hini a zo marvet en ur ganañ en euskareg :

«C'hoant em dije da ziskuliañ, ur wech ouzhpenn nagan poezius eo stad pobl BRO-EUSKADI, bezañ unanet ewid stourm a-eneb ar faskouriezh hag ewid ur VRO-EUSKADI DIEUB ! Liriet en neus din e-unan araog marwel, hag, hen adlaret a rei deoc'h : «WAR-RAOG !»

Ha klevomp iwez ar pezh he deus diakeriet an Itron PAREDES, marmen Txiki, dirag pemp ma a dud bodet e-barzh lla ZARAUZ gronnet gant ar boliserien :

«Lac'het eo bet ma mah heb justis ebet. Red eo deoc'h c'hwil holl, tud BRO-EUSKADI, bezañ unanet ewid stourm a-eneb ar faskouriezh hag ewid ur VRO-EUSKADI DIEUB ! Liriet en neus din e-unan araog marwel, hag, hen adlaret a rei deoc'h : «WAR-RAOG !»

Hag an holl dud o deus youc'het : «GORA TXIKI !», da laret eo : «BEWET TXIKI !»

KOUMANANTIT DA

LE PEUPLE BRETON

S. P. 304 - 29273 BREST-CEDEX

HANW
HANW-BADEZ
CHEMLECT
e gese e gouarnamant breizh	
strollad	30 lur/11
strollad	30 lur/11
strollad	30 lur/11
Araog an arc'hant dre chekenn-boc'h (1)	
mandat-izher	(1)
chekenn-boc'h	(1)
(1) Diverket er gerioù na servijont ket.	
C.C.P. RENNES	2365-76.

AN ITRON CLAUSTR KASTIZET E PLASS AL LAERON

Dout eo ar bod d'en em chalañ war planeden an Itron Clause, kondoaet d'ar marv ma ne vefe ket kaset arc'hant

ha mekanikoù da zispac'herien an Tibesti, en o fern, Hissen Mabre.

An impalerien gozh o doa soñjet e vefe aas awalc'h lakaad an d-Touboud da biegañ. C'hwit o deus gant o zaol fallakr. N'eo ket bet trawalc'h ewid sunañ ar c'homad. Krouet o doa ur seurt a vro hanvet TCHAD, skeudenn masket o bodañ pobloù distañvel gant ar c'hoant kenderc'h al da denañ misoù. Tapet eo al laeron bremañ. Un druez eo bet ewid an Itron Clause hag he deus paeet gant he frankiz hag he yec'had muioc'h eged ar Franzieren o deus graet droug pa oant o chom du-ve. Ewidomp-ni, Bretoned, ar miliardoù kaset n'int nemet un digol bihan pinvidigezhioù dastumet ha gwerzhet gant Bro-Frañs.



MA C'HELENNER ZO UN DEN TRIST...

N'on ket bet gouest da salaou ar gentil beteg ar fin, an diez all, ha ma c'heleñner en neus roet din ur c'hoant-kouaked spontus, en ur esaañ diluzañ kudennou an ekonomiezh.

N'eo ket aas, ma gar, bezañ skolar pa'z eo bet lakat ouzhpenn hanter-kant milion a skolidi er memes klas, ha skolidi a

beb sort : ar re baour assambles mek-ha-mesk gant ar re binvidig, ar re yaouank gant ar re gozh, ar batronez gant ar vicherourien, tud ar skuzh gant o labour ha tud dilabour.

Araod ankoued ive ar re eus kostez Bastia a zo ken pell du-hont, e foras ar c'hlass hag o deus c'hoant mond er-maes da c'hoari o femnoù, daoust dezha da vevañ ken tost da galo ar c'heleñner...

Eürusamant, gant eskol dre Television, n'hall ket ar mestri klevout an trouz graet gant ar skolidi droug, hailhevedou aweze, Marchais ha Mitterand, da skwer.

Ma c'heleñner zo un den a skiant, se 'zo skolar, un den apastalised, ha barreg da c'hoari gant ur bern sifroù.

Ma c'heleñner zo un den gentil ha hegarad ive. Ewid adkrogiñ gant ar skol, en neus degaset gantañ ur pezh mell gwastell a gouste 25 miliard, (paeet gant piw 777). Roet en neus da beb heni ul lodenn hervez e naon, da laret eo, lodennou bihan-bihan ewid ar re n'int ket kustumet da zebriñ re, ha lodennou bras-bras ewid ar re n'o deus bet biskoazh trawalc'h.

Ma c'heleñner zo un den just, neketa ? Med, perag an diaoul, e seblant bezañ ken trist neuz ? Peogwir eo echu ar vakarkioù e Bro-gc'haboù, barados ar chassourien ? Mond a raio da chasaer ar broioù estren all, araog pell...

Oc'h ober van emañ da vevañ nec'had med diaesamantou an dud dilabour, med e gwirionez :

MA C'HELENNER ZO UN DEN LAQUEN !

NOTENN : Ar frazenn d'wezhañ zo en holl geseñt e-barzh an ASSIMIL BREZHONEG


PENNAO-KAOS GANT

DONASSIAN LAURENT

POBL-VREIZH Neuse, **Donassian Laurent**, te zo bet e-pad bloavezhioù, oc'h ober war-dro ur gudenn gozh, ha diaes, heni ar **Barzhas-Breizh**, en ur studiñ dornskridoù **Kervarker** hag a zo bet an danvez d'ober ar **Barzhas-Breizh**, Evid an darn vrasañ deus ar Vretoned, ar **Barzhas-Breizh** zo un dra dianna... Petra eo ar **Barzhas-Breizh** ?

DONASSIAN LAURENT Ar **Barzhas-Breizh** zo ul levr kanaouennoù brezhoneg, bet moulet e Paris, e 1839 ha savet gant **Touffil Hersart de la Villemarqué**. **Kervarker**, evel ma raez anezhañ e brezhoneg, d'an oad a bewar bloaz warn-ugent : diouzh ma lize, en nos dastumet war maezioù Breizh-Izel, kanaouennoù poblek E 1845, e voe moulet ar **B.B.** ewid an eil gwech, hag e oa e-barzh kanaouennoù istorel ha ne oar ket er vroadenn gentañ, **Droup-kinnig Nevenoe**, da skwer, hag **Ar Rannou**, ha kalz re all.

P.V. Mad. Daomp neuse plom e-barzh ar ju : herwez **Loth** ha tostoc'h ouzump,



Ar gelennerien o c'houlennatañ D.L.

4

herwez **Gouril**, herwez an oll dud gouziteg pe dost, ar **B.B.** zo ul levr faos, graet gant traoù ijinet...

D.L. Ya, an oll dud varreg, nemet unan, **Ermual** e hanv, a deus bet soñjet beteg-henn e oa ar **B.B.** ul levr klêr, graet diwar un danvez poblek, distreset ha chafchet d'an nebeutañ, pa ne oa ket bet ijinet penn-da-benn.

P.V. Ha bremañ neuse, war-lerc'h da desenn, daoust-hag-ef e c'hellomp lâred e oa ar gwir gant **Ermual** ?

D.L. Ar gwir a oa gantañ war veur a boent, ha gant ar re all war veur a boent all. Med, re alved eo din ober ur respont klêr d'ur sort goude, peogwir e oa danvez ma zveenn ober war-dro ar vroadenn gentañ nemetken. Ar pech a oar an dud eo ez eas bet forzhig tud souezet gant mouladenn 1845, enni muioc'h kanaouennoù istorel, en tu all d'an emor tispar a skode war ar

Vretoned. Ne grogas ar reus nemed war-lerc'h an trede vroadenn, heni 1867, **Fateh an Uhel** bet o furc'hal war maezioù Breizh-Izel, nebeud tre a amzer goude **Kervarker**, ne gav ket ar memes traoù ha **Kervarker**... Tud 'zo, tud desket bras evel **D'Arbois de Jubainville**, 'n em domm ouzher ar studioù keltiek, goude bezañ lennet ar **B.B.** Hemañ dre ma'z eo un den gouziteg bras, a glask gouzout herwez, ha dret-oll : daoust-hag-ef ez eo gwirion ar **B.B.** ? Med kass a raer keloù dehañ : *Gwirion ? Kervarker ne oar ket ur pos brezhoneg pa si eas embannet e v.B.B. e 1839 ? Desavet eo bet e kêr, e Kemperle, ha ne gomze ket brezhoneg ; diaket en neus ar yezh goude. Tud evel Prosper Proux, Pengwern, a skrive kanaouennoù, o c'hasse d'un Astrol Herri (l'Abbe Herri) : hemañ a vecke ar ribot ha goude-se, e veze kenneget da g-Kervarker-un den mad ha hegredd pennadoù faos. Kervarker, entennet, a embann pep tra. Setu ar pech a veze lâret e 1867, da d'Arbois de Jubainville, enne meur a ganaouenn eus ar **B.B.**, kanaouennoù tost kar an eil d'eben, o kontañ ar memes tra, med gant gerioù all (un istor degouezet e-touesk pesantid gant **An Uhel** zo laketai gant **Kervarker** war gont tu-jentil, er X^{vet} kantved. Skriavañ a ra neuse **D'Arbois de Jubainville** pennadoù o tikleriañ : *An doare gwirion-heni an Uhel, a gont an dremm-dra, ha setu penaos eo bet cheñchet an traoù gant Kervarker. A. z. z. Sioul e chom Kervarker, ne fell ket dehañ prouañ ez eo bet leal, nemed eb embann dalc'hmad hag e pep lec'h n'eo ket bet ijinet gantañ e ganaouennoù, hegen dastumet ha rethet da c'houde. Mervel a ra Kervarker e 1895.**

P.V. An oll, war boues unanig bennag, a grede dehe neuse ne oa ket ar **Barzhas-Breizh** ul labour skiantel ?

D.L. Ya, setu. E 1900, **D'Arbois de Jubainville** a embann ur pennad e-barzh ar *Revue Celtique*, o tikleriañ penaos ez eo bet 'n em laketai **Kervarker** da embann kanaouennoù brezhoneg, goude bezañ lennet ur pennad galleg skrivet e 1836, gant **Emile Souvestre**, diad-benn ar c'hanaouennoù brezhoneg. Konz a ra forzhig e salofisoù Paris deus ar pennad-se. Dedenet eo **Kervarker**, med penaos'ra, peogwir ne oar ket ur ger brezhoneg ? Finwidig eo

KERVARKER

A QUIE BREZHONEG



Kervarker, oberour ar **Barzhas Breizh**


P.V. Sed ase un taol-kurun...

D.L. An heni keltiek, ya. Amañ, an Ao. chialont **Fateh-hun** 'n emma ket a-du ganin, war a gredan. Soñjal a ra eo goust **Kervarker** da gemer notennoù, med ne ket dehañ kredif e oa goust da gomz brezhoneg. Mes

an Ao. **Kervarker** lema ar goss dalc'hmad gant **D'Arbois de Jubainville**, petra 'raio ? Kass tud, kannaded, war-ar-maes, dindan an amzer, ha chom, ef, da c'hortos anehe, e korn ar c'hogn, brav, ken na tistroit gant ar c'hanaouennoù o devo bet dastumet un tamm e pep lec'h. Med, dre ma ne oule ket brezhoneg, ne c'helle ket bezañ war ewsh na kontrolit netra. Setu eo bet touellet ar paour-kaezh **Kervarker** gant ar re a veze o foetañ hent diwad e goust ewid dastum kanaouennoù. Ewid bezañ surtoch c'hoazh, kass a ra **D'Arbois de Jubainville**, ul lizeher d'an Ao. **Herri** - heni safaet, en noa sikourer **Kervarker** da gemenn ar c'hanaouennoù. Respont a ra an Ao. **Herri** : *N'eo ket Kervarker un heni en neus savet ar B.B., ne oa ket goss d'ober ur werzenn heb ober c'hwec'h pe setz fañs.*

Neuse, **D'Arbois de Jubainville** ned a ket da glask pelloc'h ; ijinañ a ra e deventen : **Kervarker** ne gomze ket brezhoneg ; penaos'ra tud da vont en e blass da zastum kanaouennoù ha, goude-se, gant sikour an Ao. **Herri**, eh alkempenne pep tra.

buhezskrid e dad, pa veze komzet e galleg, ouzh ur peizant, hemañ, mezhus, a responte e brezhoneg, 'n helle ket ober mod all. Neuse, soñjomp, e 1830 ! Ya, un afer a skiant vad eo kement-mañ.



Klêch Pobl Vreizh

P.V. Petra zo gwir, ha petra n'eo ket e-barzh diskleriadenn **D'Arbois de Jubainville** ?

Donassian Laurent o souten e desenn

D.L. Emaomp gant, just a-walc'h. Ha setu amañ un taol-kurun, neuse ; setu amañ ar pezh 'n eus kavet, traoù na oar ket bet diskouezet gant **Kervarker**, na diskouezet da zen abaoe e varv ; dastumadennoù skrivet penn-da-benn gant e zorn, m'en neus bet staget gante adaleg 1833, araog ma krogas **Souvestre** da embann eta, araog ma yeas ef e-hun, da **Paris**, araog bezañ graet anaoudegezh gant **Ar Goudeleg** ; ya, adaleg 1833, **Kervarker** a oa goust da zastum kanaouennoù brezhoneg e gorn-bro, en ur skrivet anehe en un doare-skriavañ spontus ar pech a fell din lâred : **Kervarker** a gomze brezhoneg, a-vihanig. Ha piw a veze souezet gant kement-mañ-un afer a skiant vad eo ? An cizred krouadur a oa o chom en Nizon. Red eo kompren penaos'ra an traoù war-ar-maes, en Nizon, war-dro ar bloavezhioù 1833-1838. Penaos ur bugel (ha war marc'had ar didoc'hig, lost an daol, hag a c'helle mont ha dont partout, gant ar varm a oa e heni, ur bern tud paour o tont davei dalc'hmad da vezañ soñjet, penaos ur bugel a sort-se n'en defe ket goulet brezhoneg ? A-boan set ar maes eus **Kambri** e dud, ne gwele nemed brezhoneg... E 1900, e skriv ma youankañ **Kervarker** e

a-benn ar fin, penaos un den, ma'z eo goust da gemer notennoù brezhoneg adal 1833, heg goud netra diwar-benn ar yezh skrivet, penaos an den-se a droc'h ar gerioù e-lec'h m'eo red ? An den-se a skriv buan a-walc'h, da heni e benn, diw ganaouenn heb a ugent pos bennag erme... Skrivet eo gant *afazioù* kemmaadurioù e-leizh, d'am soñj, n'eus ket da dermal. Un dra all c'hoazh. Kavet m'eus ul lizeher bet skrivet gant **Aurellan de Courson**. Hemañ en noa skrivet, ha n'eo ket goust **Fateh an Uhel** da dapout krog warnne, hag e oant ase koulikoude. Ma kement-se zo c'haervezet ganin-me ive. Soñj m'eus en noa lâret an Ao. **Trepos** din, un dewezh, e Roazhon ; *Opala ! Emaoc'h o klask kanaouennoù brezhoneg ? N'eo ket din ; echu eo abaoe mare ma bugaleg ; forzh penaos, ne glevan hanv ebed anehe ken. Er mareoù-mañ e vezan o vont hag o tont partout gant peotred **Radio Kimerch** ; n'eus netra neblec'h, echu, peurlous partout. Ma ! Tri devezh araog'ra ma boa enrollet un danevelladenn deus gwerz **Pontkalleg**, hit-meurbed, klok-tre ha dishetvel diouzh an oll re anavez bete vremañ.*

P.V. War-dro ar bloavezh 1960, eo t'eus kavet an danevelladenn-se ?

D.L. Ya... Da g-Kervarker e veze kanet kanaouennoù na na vefent ket bet kanet d'an **Uhel**. Ar c'hontrol zo gwir ive. **Kervarker** e-hun a rae e ribadoù ; n'en defe ket laketai an dud da ganañ dehañ traoù skañv un tammig, pe traoù a-eneb d'ar velenien. D'am soñj, ne felle ket dehañ klevet traoù ar sort-se, hag ar ganerien o-hun a oule bezañ war ewesh dirag un Astrol ken meurdeus ha **Kervarker**. Setu e lâran n'eo ket abalamour ne gar ket un den ur ganaouenn, n'eus ket aneñ. Ha pa vez lâret : *Ar ganaouenn-mañ n'eo ket dehañ deomp na dre an Uhel, na dre b-Pengwern, na dre St-Priz...* neuse, n'eo ket unan wirion, se zo diwar a-grent, tag hiziv an deiz c'hoazh, e tastumer kanaouennoù n'int bet dastumet gant den ebed en hon raog... **Fateh an Uhel**, a oa eus Bro-Dreget ; ewitañ, evel ewid **Anatol** ar **Bras**, e mars Treger, n'eus ket a varzhonezh brezhoneg.

5

P.V. - Med Anatole ar Bras ne oa ket fregetrad anezhañ : ganet eo en Duod, e Kernew-Uhel.

D.L. - Dre argouez eo ez eo ganet e Kernew-Uhel. Med eo klevad anezhañ komz ez Kernewis ! En al lizher bet kaset d'ar Ministr, pe gant un Uhel (pe gant Anatole ar Bras, n'em eus ket soñj mad), e lenner kement-mañ : *« Me garje bezañ kaset da Vro-Gernew ez-offisial da glask kanaouenn brezhoneg peogwir e val'h Kervarker da lired e eo ise en neus kavet e ganaouenn ken brudet ha n'int ket bet kavet gant den ebed abaoe. Me 'oar ervad, ne gavin netra. Med, kement ha lakad ar re a zo u-da gant Kervarker da chom peoc'h, rot, din ur yalc'had evid mont di. Hag-eh da Vro-Gernew, Distroet d'ar gêr, e skriv : « Art on d'asezet en un ostler... Ha forzh penaos, Kernewis zo gwastoc'h eged moc'h haletez : ne frot ket deha degemer en Treger. Astroù Ministr : e-lezh all, ne 'm eus klevet netra. E Bro-Gernew, e kanont tammoù kanaouenn da evañ, ha tammoù traoù skañv. »*

(Da vezañ kendalc'het)

Pennad-kaos dastumet gant paotred Kernew ar Bonedou ruz (F. Morvanou ha Marz)!

- 1 - Falc'h an UHEL - François LUZEL
- 2 - Darnveledien : verson

Beh daou viz lennit :
AL LIAMM
(saozet e 1945)
ar gelaouenn nemet o reñt,
e hwec'h gwech ar bloaz,
barzhonegoù, kontadennoù, pennadoù
a beh seurt ha keleier,
80 pajenn e peb nivereñ.
Renner : Ronan Huot.
Koumanant : 30 lur. Studierion : 25 lur.
Mme S. Chereil, 100 bd de Verdun Rennes
C.C.P. 2184-34 Rennes.

AR FALZ
KELAOUENN DRIMIZIEG AN Emsav
diazeez gant Yann Sohier
bedet ennañ skolarien ha kelemerien
Vreiz
adu gant ur skoll vrezeg ha laik gwirion.
Lennit *Ar Falz* ! Koumanant d'Ar Falz !
(25 lur evid 6 nivereñ)
AR FALZ, stradañ Kan ar Gwez
29245 Plourin-Montroulez
C.C.P. 430-20 H Roazon.

Tud Assinil zo paotred fin, avad ! Gouz'out pelec'h kavout 'glaous, da lired eo gwindeñ e-lezh
Ac'hanta, gwerzhet mad e vez ar brezhoneg ar Chonveg, ha kement yezh gwaeket eus ar vro c'hwec'h-kern, en ur chom war-c'horre, e c'haller lired enna ar brezhoneg diouzh ar c'hil en-dro, dre ar c'hil etia eo bet deuet tud Assinil da vezañ dedennet gant ar Chonveg, ar Brezhoneg, hag all...

Va, forzh pegen divalav zo bet graet d'ar Vretoned gant ar gouarnamantchoù o klask mougañ o yezh abaoe kant vloaz (hag ouzhpenn), n'eo ket marv-mik c'hoazh yezh hon tadou, evel ma vez lired a-wechoù, en un doare lu a-walc'h en gwirionez (ya, lu ! daoust hag-eh e vez komzet deus «bragner bras hon tadou», pe deus *«Istenn has mun-mun-yeuz-guzh ?»* N'eo ket dre garantez virvidig ouz hon yezh eo o deus diviset pennoù bras Assinil d'ont d'ober war he zro.

Komzomp fraezh : an ti-bennañ Assinil zo un ti kapitalist rik, ha mad pell 'zo. Red mad 'vez dimp ober gant ar pezh a vez, ha forzh penaos, un hanv brudet evel Assinil n'halle digrez nemed brud vad da Vreizh ha d'ar brezhoneg. Ha setu deus ar re-mañ, bloaz war-lerc'h an Assinil korseg, an Assinil brezhoneg, ar brezhoneg didorr, ur pezh levr, savet gant hon c'harnarad Falc'h MORVANOU.

Meur a varnadenñ zo bet graet dia deus al levr-mañ, hag e diaevas ar barnadennoù savet diwar gasonni pe untegezh, e c'haller lired zo bet graet un

degemer kaer da levr Falc'h Morvanou. N'eo ket e vefe di-er levr hon c'harnarad : tud 'eo o deus bet mil bijadur o'h ober ar gont deus an uioù-koagoc'h chomet war-lerc'h ar c'hwec'h-kern, am eus pleustret an Assinil evid diskoc'haf kement uioù-koagoc'h a zo ennañ, e-seer priedit an eil vouldenn.

Ra vo trijareket amañ raktal, Andrew ar Merser, evid ar sikour en eus roet din. Evid-se e vo rezhiet pep tra er levr 'eo o deus bet mil bijadur o'h ober ar gont deus an uioù-koagoc'h chomet ennañ. Piv 'oar ? a-benn kanti vloaz ac'hann, c'hwec'h (li) e vo klask war vouldenn gantañ an Assinil brezhoneg deuet da vezañ *«prizius meurber en 2075, abalamour deus d'eo uioù-koagoc'h !»*

Siob all 've gofeg al levr merser, re binwidig al danvez anezhañ... Med hag ur si eo kement-se c'hoazh ? Ar re a our un tamm brezhoneg bennekad a vo aes deza gwelel, buan-ire, pe-sort menjeuz a vrezhoneg yac'h, bew-beuzeg, ha liesseot eo an Assinil brezhoneg. Bikoazh noarvad, n'eus bet kavet war un d'm, ul levr-deskif ken fonnus ha ken nerzius ar brezhoneg ennañ. Falc'h Morvanou en eus bet anavez dirakon ur wech bennekad, en oa bet ankouset tamm-pe gwelel, un amzer zo bet brezhoneg e vugaleg ; poan 'm eus e kredif kement-se, pe wlaas, pa c'hall an holl gwelel, pegen don eo an anoudegezh en eus ar yezh, eus ijin ar yezh, eus pligou ar yezh. Pell omp amañ, ha diouzh an trefodaschoù treut ha dister, ha diouzh ar

AN ASSINIL BREZHONEG

brezhoneg a raer anezhañ «brezhoneg chimik», da lired eo, ur brezhoneg n'eo brezhoneg nemed dre an hanv, ur paour-kaezh pariant ber-allan n'eo ken, savet war framant ar galleg hag o varmoasañ gant mil vizer *«yezh hon tadou»*, just a-walc'h. Ha koulskoude, goud a oar Falc'h Morvanou d'ont er-maes deus al levr gozh. Ewitañ da chom tost d'ar yezh gomzet, ha komzet war ar maes zoken, e tigor an oberour hentel nevez. E vrezhoneg zo bew, dres, nerzius ur wech c'hoazh, n'eo tamm ebed ur yezh war he zremevan. Krouñ a ra getoù nevez diaon, med dalc'himad war ar c'hef kozh. Un dud eo, en gwirionez, lenn sort brezhoneg, blas mad gantañ dalc'himad. Ha noarvad, eo gwir pezh a skriv an oberour : *«Gant Pabl Vreizh eo bet pourchaset danvez al levr-mañ.»*

N'em eus ket poan o krouñ e'ch eo brezhonegerien hon bro ar re o deus, evid gwir, savet an Assinil brezhoneg. Hag evid ur wech, evid ar wech kentañ merser, oll gwiridunad ! amañ e kavomp ha mouezh Leon, ha mouezh Treger, ha mouezh Kernew, ha mouezh Gwened, ya, ur yezh hepken gant he feder rannyezh, heb troc'h ebed etrez. Pep hent a challo kavout e rannyezh, ma kar, heb en en garr'hariañ enni. Ha diwar an holl rannyezh, e weler o tont war wel ur gwir gennyezh, ur yezh arnewez, mar karer, prest da vezañ kenniget da neb piw bennekad, e fello gantañ er vro vrezhoneg pe get, a fello dezañ ober gant yezh Breizh. Evid ur wech ive, un digol a-zoare zo bet roet (a-benn ar fin) da rannyezh Gwened bet aberezh betek re war aoter ar men-unanvridyezh ; ur rannyezh ken dibar ha ken pinwidig, n'halle ket ur


brezhoneg etre-rannyezhel kenniget amañ ober hept, anez bezañ diglok. Hag e reu neuz ket oberour an Assinil brezhoneg, ur yezh vodern gwirion, he gwirion don gant er rannyezhioù lenn enna ar sew hag aes-kaer displegañ gant kement a zo red er vuzeh a-vremañ.

Maarvad eo hemañ an tewañ Assinil bet moulet bikoazh. Ma l an deskard o digollet deus ar boana genero. Rag, daoust da Assinil kenig hennemoù da zekfif ar yezh *«heb poan, didorr, red e vez bezañ aketus da vont war-rao. Arabad kaoud ur stonok re glogig merser, rag bloed fonnus eo hemañ !»* Med an oberour a oar paskañ o boued d'ar vugaleg ive : mad 'vo d'ar re-mañ ar re zo dizek a-greñ en brezhoneg-nompas ment re vuan, er c'ontrol, chom pellic mat war ar c'hente-liou kentañ. Ar re all, ar re a re zo barreg dija, a gavo traoù da zekfif c'hoazh, hag e-lezh.

E-touesk al levrioù bet savet da zekfif brezhoneg, hemañ zo, heb mar, unan deus ar re wellañ bet savet bikoazh, hag en desped d'an nizehoù lenn a uioù-koagoc'h, pep hent a gavo ennañ, brezhoneg bew ha yac'h. Ur wech c'hoazh : mad 'vo d'ar skollad d'ere-hel da vont ha goude-se, brezhoneg e kement digoez, rag, re wir eo, *«hep brezhoneg, Breizh ebed, ha gwir eo c'hoazh kement-mañ : Heb Bretoned, brezhoneg ebed ; setu : heb ar stoulizenn, Bretoned, na Breizh, na Brezhoneg ebed.»*

Lag KERVOAS

EMAN AR BONEDOU RUZ O TONT !



DA GENVER TRIC'HANT VED DEIZ HA BLOAZ AR BONEDOU RUZ, A ZO BET ROET GANT FRANCO DA LOEIS XIV KROAS AOUR AR GWASKEREZH

A-benn pemzekteiz ac'hann, e vo krogot o zro-Vreizh gant komediañcherien e'le Théâtre de la Tempétes, a c'hoanto dirag ar Vretoned pezh-c'hoari Paul Keing *«Le Printemps des Bonnets Rouges»*.

Moañeo vo deoc'h mont da weled aneze an :

- Montroulez d'ar sadorn 8 a vis Du
- Brest d'al lun 10 a vis Du
- Pont-N'Abad d'ar merc'h 12 a vis Du
- Kemper d'ar yaoù 13 a vis Du
- Karées d'ar sadorn 15 a vis Du
- Pondi d'ar sul 16 a vis Du
- An Oriant d'ar meurzh 18 a vis Du
- Gwened d'ar merc'h 19 a vis Du
- Sant-Nazer d'ar gwener 21 a vis Du
- Naoned d'ar sadorn 22 a vis Du
- Roazon d'al lun 24 a vis Du
- Sant-Brieg d'ar merc'h 26 a vis Du
- E Gwengamp d'ar yaoù 27 a vis Du
- Pris : 20 lur evid an dud vras
- E Gwengamp d'ar yaoù 27 a vis Du

Tommet e vo an deltenn vras. M'ho peus c'hoant da zerc'hel ho

TOULL BLEW HAG IBILH KIG

Hiziv an deiz, ne gwever komz nemed eus hudurizhezh ha drest-oll, eus ar pornografiezh er sinema ha gwir eo ez eo tremen divise an darn vrasañ eus ar filmoù a c'heller gweled ar salioù terfial. Allobet eo bremañ ar c'hentehoù bihan evel ar vras. Ur skwer hepken : diskouezet eo bet ar film : *«Les Basissuses»* e Sant-Brieg e-pad c'hwec'h mis.

Tud 'zo a lavar emañ skiant ar re yaouank a-vremañ hec'h ma vez lakad ar v' d'ar yar. Aaset da lired mad e gwirionez n'eo ket hepken ar re yaouank a seblant bezañ dedennet gant sort filmoù. Mond ra tud vras ha zoken tud an oad da weled anezhe ivez.

N'eus forzh penaos n'eo ket ez eus amañ d'alc'h. Red eo en em c'houlenñ da gentañ, da bwa a brofit ar c'hwec'h-mañ. Ma l N'eo ket dias respont. Da gentañ, eveljust, da sevenen ar filmoù-se, d'ar bankoù a brest arc'hant dezo hag ivez da berc'henned ar salioù sinema. Da c'houde, e profit d'ar stad, peogwir e vez paet talioù warne, hag a paet muioc'h-mui

plasoù an araog, kassit ur chekenn-bank pe ur chekenn-bost da : Pabl-Vreizh B.P. 304 - 29273 Brest Cedex

Evid ar prizioù ispisial evid an dud a deus a-strol, skrivit ivez d'ar gelaouenn.

Newez-Amzer ha Kozh-Amzer...

Martees, 'peus bet klevet c'hwec'h ive hiniennou o'ch ober fent war zigare zegoze *«Newez-amzer ar Bonedou Ruz»* pad ar c'hozh-amzer (pe disk-an-mez) ! Koulskoude, d'ar 15 a vis Here, 'gav din, oa kondoañt ar Mogn Bras gant les ar roue ba Karées *«ho vod' kasset, ur gorden 'n e gerc'henn, idakabell ha diac'h-en-kaer, war lost e roched, betek no-dal is Sant-Tremer Karées, hag eno, war benn e zaoulin, goull pardon gant an Astroù Doue, gant ar roue hag e Justiss ; ha neusen boull kasset d'ar leurgig, laket war ur c'haos save e-tal ar group, astennet war ur groas Sant Andrew, ha breset e*

isili a daolioù berrannoù-houarn (pemp tadoù), goude boull 'taget d'ar marv, ha chom barzh eno betek 'benn arc'hoazh beure da c'hwec'h eur-ha-benn neuzen, kass e gorf da barrez Brog, 'stribaññ anezhañ war ur rod uhel, war bord an hent bras, tost d'ar Vreizh, ha leskel anezhañ eno ken na vireno heb urzh da zen ebed da lenn anezhañ, 'nes difañ ar roue hag e Justiss... (1).

Tri dewezh kent, gwit eo, d'an 12 a vis Here 1675, oa bet graet ur prosas da gorf ar Balp, marv abaoe an 3 a vis Gwengolo l. Disinteret e gorf, ha disteget beked nor vras Tl Meur, da ziskouez anezhañ d'an dud, ha neusen, adrewek e gorf ha haddiskouezet war ur rod uhel... (2).

Ne oa ket brav difañ hon atonrez tri c'hant vloaz : zo l Setu, me 'gav din, mis. Even pe 'nis Here, n'eo ket re diwekad oll evid digress soñj eus ar Bonedou Ruz.

(1) Newez an dibelloù embannet gant Garlan ha Nieres, *Les Révoltes Bretonnes de 1675*.

(2) Abalamour da se martees, emañ klopenn ar Balp ba' chapel Sant Drezoarn (parrez Kergloff).

departamantoù all hor Bro hag e departamantoù ra to hon hent ? Ne gredomp ket. Ne zeu ket an heklevioù betek enomp. Amañ ar spered kellig liammet gant koustañt e renk a gignas taender hag ewech. Ne roimp nemet ur tollet an darvoudoù diwezhañ :

- 16 paotr eus ar maestou barnet adarre e Sant-Naser ;

- 9 micherour kondoañt n'eus ket pell, hag a zo nac'het dezo al labour o deus ezhom evid o ziegezh ;

- Film Ronan Vautier war an usin Simm (Sotrimoc'h) hirwi hag a zo troc'h et c'hoazh tammoù ne bijotet ket d'ar battoned ;

- Labourerien an usin B.N. aet skuzh da c'horro ataw ur c'hwec'h war o c'hor hag a zo chomet e-barzh nos ha deuz e sell da lakad ar renenien da blegeñ ;

- 500 den yaouank kounaret goude klevet e oa voull Franco kass 5 paotr d'ar marv, a zo aet betek ti ar c'housal, o deus torret an dorioù ha draset toued ar pezh a oa e-barzh ar burevioù.

P'wa a gredfe lavaret ez eus frankis ? Ya, frankis a zo med n'eo ket med frankis an arc'hant ha netra ken.

REUS ATAW E BRO-NAONED

Ne vefe ket awalc'h a blas war e.P.V. a evid kontañ dre ar munud pezh a c'hoarvez e Bro-Naoned hag a ziskouez aplann n'eus nemet ar re binwidik, a ra al leaenn. Daoust hag e us kement a draoù, e



MONO